

CANTIC

DA

ITRON VARI AN ARMEOU

Var an ton : *Itron Varia Guir Sikour.*

DISCAN.


Itron Vari an Arméou,
 Ah ! silaouit hor peden,
 Taulit eur sell eus an Envou,
 Var hor soudardet kristen.

Siouas ! da vil ha mil danjer
 E maint bemdez exposit,
 Ma n'ho zicourit, Mam dener,
 Cals anezo 'vo collet.

Ar bed, ar c'hig a ra dezo
 Noz, deiz, eur vrezel scrijus,
 Astennit, eta, varnezo,
 Guerc'hez, ho preac'h galloudus.

Satan ar Serpant milliguet
 Isign ebet na espern.
 Evit ho zreina d'ar pec'het,
 Ha var e lerc'h d'an ifern.

Grit, en despet d'ar goall scueriou,
 Ma chomint stard en hent mad,
 Fidel d'ober ho deveriou
 A gristen ha re ho stad.



O ! grit na zizonjint biken
Kentelliou ho mam garet
O d'eus desket, var e barlen,
Caret ho Mab benniguet.

Grit ive na heuillint jamez
Nemet compagnunez fur ;
Ma claskint er *Cercl* aliez,
Diremors, ho fijadur.

Ia, divouallit hor soudardet,
Ho feiz, ho relijion,
Ha grit dezo bepred caret
Ho Mab a greiz ho c'halon.

Guerc'hez, dre ho calon dinam
Ha calon ho Mab divin,
Grit ma vevint atao divalm,
Direbech betec ar fin.

Ha ma rancont var an dachen
Ha pell ous ho bro mervel,
Roit dezho ar gurunen,
Ar gurunen eternal.

~~~~~  
PROPRIÉTÉ  
~~~~~

IMPRIMATUR :

F. OLLIVIER,

S. S.

Kemper, moulet e ti de Kerangal.